

(354)

Un eil Eva.

Bara laeret a zigas gout debri,
 Hag an difen a ro c'hoant d'e derri.
 Lezit an den en e liberte franq,
 En e youl da g'emeret e lanq,
 Tu man - tuont hed an deiz nep aon,
 N'er c'hevot get finvet divar e scaon;
 Mes mar deuit da zifen a gri fors,
 N'en deveus get da dremen e zor bors,
 Parzet, mar car, dre gant devez arat,
 Zo adre 'n ti, er verjes hag er prat,
 Bada ra prest, qen enq e varnezan
 N'omp get besterd abeurs hor mam g'enta.
 Mes arabad e ve cals re vuan barmet,
 Me our erfat e deo a gals re farziet.
 Ha ne deo get e excus a fell dign,
 E fec'het a zo deut evel an tign,
 Da souilla 'n oll dre 'n tach original;
 Mes bezza zeus hag e c'hef criminal,
 A deu brema d'e c'hondaoni ep gras,
 Ne rajent vell, ma vijent en e flas.
 Un ozac'h fur, ne fell get en henvel,
 A lavaras qementma, neus get pell,
 D'e bried qer, scuis o clêvet gant
 Enep Eva e c'hri hag e zowmi:
 — Ah! eme 'r c'hreg, dre eur goler ardent,
 Pelêc'h edo, mam Eva, da sqiant,
 Dont da deurel var mellou da c'houzoug
 Hoassa higner en eur evelep droug?
 Dig'eri 'n or d'an ancou da larza
 Nep a dliez da garet ar muia!
 Na p'evit tra? Evit un Anal glaz!!!...

(355)

Da c'hinou sur a voa meurbet dislaz !
 Ar sonch epqen demeus da aval trémg
 A gris va min hag a daltourz va zent.
 — N'e get 'n aval, p'én a voa mat pe fall,
 Eme 'n ozac'h, eo a eure ar goâl ; (356)
 An difen voe a voa bet grêt outi
 A reas blaz - vad ha dezir d'e zebri ;
 Hag evit mery ezgo quiv qementman,
 Ma tifenfén ouzoc'h-u, emezan,
 Euy dra benag ne ve get d'oc'h afer,
 Ha ne vec'h get e soursi da ober ;
 Coantoc'h zo c'hoas : ma tifenfén euy dra
 Hag a rafe deoc'h euy noarz ar brasa,
 Scanbenet vec'h en defot en ober.
 — Mén ? eme 'n c'hreg. — C'hoasi oc'hunan caer,
 A respontas an ozac'h, ha cloustre
 Laqit ar questl en daouarn eun trede.
 — Ha pa zafen bete va c'hrez nesa,
 Ret, emezi, eo en defaranta.
 Pariet voe, a raport an histor ;
 Daouzec louiz - acur oc'h eur vroz sarrignol.
 — Geuz ve ganén, m'ey ozac'h, den a beoc'h,
 Ordren petra a gafac'h dies deoc'h.
 Ho custum eo, pa vez tom an amzer,
 Mont arichou d'ey en voalc'hi d'ar ster.
 A gleiz d'oc'h hent eus duont eul loag'en : (357)
 Mar g'illit chom, epad eur mis epqen,
 Ep e souplac'h el loag'en ho taou droad,
 Deoc'h an arc'hant ... me ne din get er c'hoad ;
 Mes dioñallit na dac'h re dost d'ar bord,
 Na ve varnoc'h e coesefe ar sort.
 Mar dit ebarr, eo collet ho losten.
 Ret e c'houfac'h petra voa al loag'en
 A zifene ar goaz ouz ar vaouez :
 Ne voa nemet eur sac'hat dour hanouez,
 Eur poul fleryus, carg'et eus ar mardos,
 Hag eus ar glao en em sil diouz araoz,
 Eur c'hant leo dro a raje pepini
 Erit miret na rancje e zreuzi.
 Fae voe ganti clêvet an ordrenans,
 E sonch dezir ezgo afet defans

- (358) Eo deut e goaz d'ober eur sort defi,
 Evit caout tro da rei an arc'hant dei.
 Emân an aour dija en e godel;
 Gement a dal, mes ne chomint get pel,
 Destinet int da brema nevezion,
 Goalen arc'hant, gans ha danteleziou,
 Ha var an oll eur re bervanchou seiz;
 D'al len e zer pa zê avanset an deiz,
 ;iag en eur vont e ro eur tol-lagad
 Varzu 'l loag'en. Ne voa get eur sin vad.
 Sellet a gorm evit ar c'henta beach,
 Mes a greis fas an eil ha trede queach
 E zer..... e teuer..... hag e tostêr bep paz
 buz bord ar poul a voa var an trespas.
 O vont, o tont, queach gorec, queach afô,
 Abiou 'l loag'en a gontempler ato
 Diouz pep seurt tria, er c'his ma lavarar,
 Nemet diouz tol bas en em accoustumer.
 Ne voe get pell na zeuas hor maouez
 D'en em ober diouz c'huez an hanouez.
 An drede quech ma tremenas abiou,
 E' h arêt creñ da admira al liou.
 Dem-zu, dem-c'hlag, christinen an drusa,
 Hag evel mad ouz eur zouben ar fa.
 Speret an den zo estranch da gompren!
 Pa lavarar e jeneral an den,
 E roan d'ar c'hreg demeus ar voalenad,
 Tri falavarez troc'het ha muzur mad.
 Ar virionez ne servich get da nac'h.
 Dont a eure en faltari ar plac'h
 En em g'afje eur serten plizadur
 O clabousat eur poul du hag impur.
 Ne zifer nemet an neb zo sot.
 Al len a voa qer pur hag an dour pôt;
 Sabligou coant a huye er quelet:
 Biscoas qibel n'en devoe den quelet,
 Na mui na mez, an dour fresq eus al len
 Comparachet ouz hini al loag'en.
 A g'ef dizadour dezsi d'en em voalc'hi.
 Satan, ep mar, a voa eus ar barti.
 Ne verg get cals e voe pe ne voe get,
- (359)
- (360)

Da viana, ar vreg a voe secret
 Var e design, ha ne lavaras g'er
 D'e flac'h fanton, a voa en e c'hever :
 Oñes a voa e mignonez fidel ;
 Outi netra ne alle da zerc'hel.
 E humor vad, e c'homzou grasius,
 A zalc'he plas eñ eus a vertus.
 Ne voe matedz souplac'h en e micher,
 A bruije quell entent a anter-c'her.
 Epad deg vloaz ha trégont mis oupen
 Ne voa get plac'h da lavarret naren.
 Derc'hel a rent etreze o diou,
 Unan ar vout hag eun all ar c'hillou.

Mes reir zo emamp gant ar vatedz.
 Poent eo distrei da gomz eus ar vestrez.
 Gresqi a ra bep moment e zorc'hen ;
 Ne deus qen sonch nemet eus al loag'en.
 Labal a zo p'en em gaver e c'harz,
 O clasq miret na rer eul lam ebars.
 Sul dost ma zer, bemdez var zu ar bord,
 Mar stourmer c'hoas eo dre lies efort.

(361)

Ne get al len, n'en deo get an dour scler,
 Al loag'en eo a blich hag a glasger.
 Guelet a rer ar poul o vourbouillat,
 Gant an ouidi zo enna eur bagat,
 Ha chom a blas d'o c'honsideri pis,
 Ha d'o disquel da fanton gant ar bis.
 Outo dija eus eur maniel avi,
 Ha ma halfe troq ouz an ouidi,
 En e c'halon e carje hor maouez,
 Dont da veza eur moment ouaderz ;
 Mes var darbet, en eun dentation,
 Pa na dec'her ouz an ocarzion,
 Ne chomer get, rac ato er pec'het
 Eñ er larcoc'h evit na voa sonjet.

Un deiz ar c'hreg ha chom da zeberji
 Var bord ar poul, dont eur frouden dezi,
 Hag hi teña e zroad eus e boutez,
 Ha gant e blant hag hi spina in hanouez.
 Nemet ar plant ne douchas goucoude,
 Rac ar scrupul e zrubuillas neuze.

(362)

Petra benac ma voe ar gombat lér,
 Mes caout vertus zo mat en eun afer.
 An ozac'h fur, ep beza curius,
 A ziabel d'ar vouillyienenn flerius,
 Eus e c'hrignol entretant a ra g'yed,
 Haq a vel oll petra ra e bried.
 C'hoarzin a ra Yan gen a fréz e vrenit,
 Ne ell get c'hoaz gourzout beté peg'ait
 E c'halfe mont; og'en var e bemp bis
 E ra e gont, n'echus get e mis.
 Conta ré mat, ervez ma remerqer,
 Rac ne voa get c'hoas eat d'ay antér
 Pa zeu an deiz, maleurus eviti,
 An ozac'h fin bemdez o contemphi
 An avans bras a ré 'n dentation,
 A c'hoarias d'e c'kreg eun dro fripon.
 Ne allan get en em viret d'e vlam,
 Dont a eure da lavaret d'ar vouam,
 En doa da vont eun tu en eur bale,
 E tistroje qerqent ha fin an de.
 Diblas a ra dious an diaverz
 E clasq e dro da vont er c'halatrez.
 Ha dre eul lucarn a voa antér-serret
 En em laga adare d'ober g'yed.
 Ne voe get pell na deu da remercont
 Ha greg ha plac'h o comeret o rout
 Etreze 'r stér, er mès ar venojen,
 Memesamant dre vordiq al loag'en.
 Entredemaz na deunt da fals-verchi,
 Da vont ebars martéze da veuzi.
 Erit gallout e velet en o éz,
 Var bord ar poul e reont eun azez,
 Ha bec'h a zo o sevel goude se;
 Gant cals a boan e saver gouscoude,
 Ha var su 'r stér e poursuiter ay hent,
 Mes eus an dour e sortier cals gent.
 Eg'ed ma voad custumet da ober,
 E seblanté e ve poazet al lér.
 Na ra 'n dour fresq nemet en em chala;
 Na ell pelloc'h o fallout rezista;
 Goasât a ra d'e inclinasion,

(363)

(364)

Ha d'ar vertuz e tifi e c'halon.
 Ah! Janton g'ez! sel ha na sel ouz gen,
 Eme 'r vestrez, demeus bordic al len;
 Ne allan mui, eur ret absolut eo,
 Ha p'am dollfes divar boues ~~ha~~ bleo,
 Ne deus difi na claoustré da zifen,
 Ne lazan get va c'hol da eur spillen.
 Me lavar dit eur g'er hag a zo ber:
 Mont el loag'en zo eun dra neceser.
 Lavar arze qement hag a gari,
 E vo quezet gant an oll dud an ti,
 Pe ne vouezo den, ne m'on get e poan,
 Ha pa n'am be tam bara bet d'am c'hoan,
 Mervel a rân ma na doran va c'hoant.
 E leal, Mestrez, an draze a ve coant!
 Eme Janton, hag e reac'h eur mister
 Ouzin-me c'hoas, eus eun dra gen dister!
 Me n'on get sot: aboue an dere'hent-dec'h,
 M'em boa santet e voac'h ganti a vec'h;
 Mes c'houi zo simpl dont d'ey em dourmanté
 Gant rambrez, ha claoustré, ha difi:
 C'houi a fel deoc'h, neo get-ta, ey ober,
 D'ar c'henta pœ, nema get Jam er g'er.
 Piou er gouezo? den ganet, va c'hredit,
 Ha p'er goufet! o coll ho claoustré oc'h quit.
 Eun dra gaer! ha d'ar baz e zac'h-u?
 Pa ve 'n arc'hant qer stang hag al ludu,
 Ofret din-me, eneb va bolontez,
 Contantamant a dal mui g'et danvez.
 Mes qer subtil ni a doulllo ar fals'h,
 Ma verzo deoc'h an ebat hag ar yalc'h.
 — Qé, eme 'r c'hreg, qé, o va Janton buour!
 Te dâl din-me da bouez demeus a cour.
 Arabat eo apel mui ar barti,
 Na qer buan e arc'henat ganti.
 Dindan o bec'h o tiblas a disvad.
 Janton var lerc'h a zoug lod e dillad.
 Dre ma zeont e c'hevesaont var dro
 Hag en a ve den o sellet outo.
 N'en deus christen, ha Jam a zo et pell;
 Dêvi ra 'n treid fot mont er poulig'el.

(365)

(366)

(367)

Demeus ar bord e leger da g'enta
 Euy troad er poul, ha qer buan en tēna,
 Hag en e blas e poulser eg'ile,
 Hag a deñer neuze soudēn ive.
 Goude emān, ha goude an troad all;
 Erfin, goude cals a ormidou fall,
 Ne deo qet ret parlant eus an oll draou-
 Lerc'h divar lerc'h, prest o foulser o daou
 Bete 'l lic'hit, ma chome ar ranet,
 Pebes dudi ! neus plijadur ebet
 E comparach d'ar joa ha d'an ebat
 A g'ef ar c'hreg er poul o clabousat.
 Biscoas qibel, qret gant peb seurt bouzon,
 Na ras qen soupl na qen tuez he mempron.
 En dra badas gant ar c'hreg e ofis,
 E voa 'n ozac'h dre 'l lucarn vis-a-vis,
 Oc'heressat ar c'hoari pen-da-ben;
 Guelet a rē ar poul hag al loag'en.
 Gras vad a oar; mes dezan e-human
 Ne voa qet deut dean a breven dre an tan,
 Mes dre an doue limpid, ha diazes ha fresq;
 Vertuz e c'hreg qen neverz ha qer bresq.
 Petra benac ma seblante demp meur,
 Entredemarz na eruas drougheur.
 Grena ra c'hoas o sonjal en danger,
 Hag o velet eo eat larq an afer,
 E teu d'o c'haout gant eur c'hoarz goapaüs,
 Ar bug'el-noz ne ve qet qer spontüs
 Ha ma voe quel eus e ozac'h d'ar c'hreg.
 Hag int dirol, m'ar gouient, da reded.
 En divarlerc'h ne deuas qet d'o freni,
 Rac beza cos da fleuruzi dezi.
 Etre ar g'er e qerz evel jore,
 O c'houl erfat en euy tu er c'hafje,
 Hag ep dale da glasq pemp troad d'ar maout:
 — Ha ! emezan, qenta m'allas e c'haout,
 Eus a Eua ha demeus e aval,
 Petra on eus-ni brema da sonjal ?....

(368)

Fin.